

CANTIC

EN HENOR

D'AN AOUTROU SANT JOSEPH.

Var don ar c'hanticou : { *Ar voyen d'en em assuri.*
Eun Doue a deu da barlant.
 Pe don : | *Guez nevez Santez Anna.*

Saludomp gant devotion,
 Gant fizians ha carantez,
 Ha kemeromp evit patron
 Pried Santel ar Verc'hez.


DISCAN : Henor, respet ha carantez
 D'a Sant JOSEPH hor patron !
 Ni a gano hed hor buez
 He veuleudi a galon.

Sant JOSEPH a zo galloudus
 Rac gant Doue eo caret ;
 Ha da veza trugarezus
 Gant JESUS eo bet scollet.

Sant JOSEPH, me gao d'in guelel
 Hirio c'hoas var ho peultrin
 Ar Mabic JESUS morgousket
 Ha laouen o vousc hearzin.

Ar galon var bini JESUS
 En d'eus alcodei he benn,
 Zo tener ha carantezus,
 Kemense a zo certen.

Sant JOSEPH d'an oll zo roet
 Evit patron, evit skouër :
 Rac-ze er guelomp henoret
 E pep leac'h, e pep amser.



En he zourn eur souedilizen,
Sant JOSEPH d'ar yaouankis
A lavar poania da dremen
Ho buez gant, honestis.

D'ar labourer, d'ar micherour
Sant JOSEPH a lavaro :
« Carit ho micher, ho labour,
Ha dizoursi c'hui vevo. »

Sant JOSEPH en d'eus labouret
Evel doc'h, micherour paour.
Ar bara gant poant gounezet
A dal muioc'h evit aour.

Piou vo tentet da vurmuzi
Var he labour, var he stad,
O velet JOSEPH ha MARI
Gant JESUS, o labourat ?

Sant JOSEPH, pa c'hui zo euruz !
O c'heus bet d'hoc'h assista,
Ar Verc'hes MARI ha JESUS,
En hoc'h amser diveza.

Sant JOSEPH, pa zepi ar maro
D'hor guervel eus ar bed-ma,
Grit n'a vezo ket re c'haro
Deut neuze d'non assista.

Sant JOSEPH, ni ro deoc'h hirio
Hor c'halon, hor c'harantez,
D'ar yirviken c'hui a vezo
Patron caret hor parrez.

— Meurs 1866. —

PERMIS D'IMPRIMER :

A Quimper, le 8 Mars 1866.

EVRARD, Vic. gén.

Propriété de l'Éditeur, JOHANNES B. KAVEL, impr.

Moulet à Montroulez, le ty L. Baslé, rue d'Aiguillon, 6.